

D'ar 14 a viz Gwengolo

- Gouel ar Groaz Klodus, Exaltatio Sanctae Crucis. Lidet e Jeruzalem kerkent hag ar Vvet kantved, e vez kavet d'an hevelep deiz e levrioù lidel ar C'Hornôg adalek ar VII vet kantved. Lidet e veze antronoz dedi brientiliz an Dasorc'h e Jeruzalem – oc'h engronnañ enni ar Menez Kalvar hag ar Bez Santel –, bet savet war intrudu santez Helena gant skoazell he mab Kustentin, goude m'he dije adkavet, e 326, ar Groaz Santel. Er seizhvet kantved, pa voe aloubet ar Gêr Santel gant ar bPersed hag harluet e Persia an Henaour sant Zakaria, e kasas gantañ relegenn ar Groaz. Pa voe trec'het ar bPersed gant Heraclius, impalaer ar Reter, e voe degaset en-dro ar relegenn hag e voe lidet Uhelsavidigezh ar Groaz Santel d'ar 14 a viz Gwengolo 629.
- War-dro 253, e Roma, merzherenti sant Cerealis ha santez Sallustia. Endra ma veze kaset ar pab sant Korneli d'un templ o klask e rediañ da aberzhiñ d'an idoloù e c'houlennas outañ Cerealis, unan eus soudarded an amheuliadeg, mont da weladenniñ e wreg a oa klañv ha seizes en o zi abaoe pemp bloaz. Korneli a yeas di hag he fareas, kerkent e voe badezet gant he gwaz ha graet testoù eus ar burzhud. Neuze e voent dibennet o daou war ar Via Appia.
- En deiz-mañ: sebeliadur sant Korneli ha merzherinti sant Kiprian a vez lidet o gouel d'ar 16.
- E 1214, e Sant-Yann-Akr e Palestina, sant Alberzh Jeruzalem, feizvonnour eskob ha merzher. Treuskaset eus sez Vercelli er Piemonte da hini Jeruzalem, e roas ur reolenn vuhez da benitiourion Menez-Karmez. Drouklazhet e voe a daolioù kontell gant ur prelad en doa tennet e garg digantañ abalamour d'e wallvuhez.
- E 1815, e rannvro Sichuan e Bro-Sina, merzherenti sant Gabriel-Taurin Dufresse, eskob misio-ner. Ezel eus Misonoù Diavaez Pariz e voe dibennet gant 119 keneil goude daou ugent vloaz a abostolerezh frouezhus er vro.
- War-dro 908, en Iwerzhon, sant Cormac MacCuilleán, eskob ha merzher. Eskob Caiseal, brudet evit e garitez, e zeoliezh hag e galonegezh, e savas ur gerva iwerzhonek anvet Sanas Cormaic hag e embannas ur salmaoueg. N'ouzer ket penaos e tegouezhas gantañ bezañ anvet roue Munhan (Munster) e 902 hogen e voe lazhet e Leinster e 908 dre m'en dije klasket adsevel levezon Munhan war ar rannvro-se. Burzhudoù a c'hoarvezas war e vez e Casteldermot e kontelezh Cill Dara.
- E Breizh, e 1636, ar pac'hiad Yann a Sant-Samzun, lean karmezat e Dol hag e Roazhon, kevri-nour, mestr speredel hag adreizher.

D'ar 15 a viz Gwengolo

- Gouel Itron-Varia Druéz. En he sav ouzh troad ar Groaz lec'h ma varve he mab e voe treuzet kalon ar Werc'hez Vari gant ar c'hleze a c'hlaç'har bet diouganet dezhi ergentaou e Templ Jeruzalem gant ar c'hozhiad Simeon da geñver Kinigadenn Jezuz. Ar gouel-mañ a zo bet ouzhpennet en deiziataer roman gant ar pab Pius VII ur wezh distro eus e vac'hidigezh e Fontainebleau da vare Napoleon Bonaparte impalaer ar C'Hallaoued.
- En eil kantved, e Roma, merzherenti sant Nikomed, beleg. Dre ma nac'has aberzhiñ d'an idoloù e voe skourjezet gant kerdin plomet hag e varvas. E deroù ar VIIvet kantved e voe savet gant ur Pab Bonifacius V ur brientiliz war e vez, e bered hent Nomentane.
- E 178, e Tournus, merzherinti sant Valerian. Harzet evit ar wezh kentañ d'ar c'houlz ma voe dinodet kumuniezh kristen Lugdunon gant sant Potin en he fenn e c'hellas tec'hout kuit ha kavout repu e Tournus lec'h ma oa etrepaouezioù kenwerzhmeur. Eno e vevas en ul lochenn hag e komze diwar-benn Jezuz d'an dud deuet eus a-bell d'ober kenwerzh. Diskuliet, e voe harzet ha jahinet gant ivinoù houarn a-raok bezañ dibennet.
- E 687, sant Achard, abad Jumièges war-lerc'h sant Filberzh. Mab d'un ofiser eus lez Klotar II a Vro-C'Hall, e voe desavet en abati Sant-Hiler Poitiers lec'h ma tistagas e ouestloù. Diuzet e voe da abad Sant-Benead Quinçay ha da c'houde e voe galvet gant sant Filberzh e Jumièges, nepell diouzh Rouen, hag en e warlerc'hias en abati-se a gonte c'hoazh ur mil vanac'h bennak.
- E 1386, ganedigezh en neñvoù ar gwenvidik Roland Medicis, penitiour e Borgo san Donnino e-

kichen Parma en Italia. Bevañ a reas en digenvez, pourc'hraet gant kroc'hen gavr o tebrñ frouezh e-pad an hañv hag o kestal e voued e-pad ar goañv. Gwelet e voe meur a-wezh o chom da bediñ e-pad eurvezhioù, difiñv war un troad, e zivrec'h astennet hag e benn troet davet an neñv.

- E 1510, distro da Zoue ene santez Katarina a Jenoa, intañvez ha kevrinourez. Merc'h an tiegezh Fieschi anezho uhelidi eus Genoa e voe dimezet dre heg d'he 16 bloaz d'un den feuls ha digredenn daoust ma felle dezhi mont da leanez. Digalonekaet en em roas neuze da blijadurioù ar vuhez he na c'hounezas nemet tristidigezh diwar-se. D'he 26 bloaz avat he devoe ur weledigezh eus ar C'Hrist kroastaget hag e kemmas buhez oc'h em en reiñ d'ar binijenn ha d'ur vuhez rust. Grataet e voe dezhi goursavioù ha donezonoù kevrinel liesseurt. Gonezet e voe he gwaz d'ar feiz hag e teuas da vezañ tredead frañsiskan. Ur wezh intañvezet en em roas a-grenn d'ar bedenn, d'ar yun ha d'ar binijenn war un dro gant gweladenniñ ar glañvourion, intent ouzh ar lovriddi hag ar vosennidi.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Marzhian, manac'h, kelenner sant Herve.
- Er VII vet kantved, santez Errell, penitiourez. Genidik eus Iwerzhon e vije deuet da Vreizh.
- En Iwerzhon, e 620, sant Merrin, manac'h, diskibl sant Komgall e Bangor.

D'ar 16 a viz Gwengolo

- Gouel sant Korneli, pab, merzher e 253, ha sant Kiprian, eskob Kartada, merzher e 258. Kiprian, a-unan gant ar pab Korneli a stourmas enep Novasian a nac'he ar pardon d'ar renavied. Barnet d'an harlu, e resevas Korneli ul lizher kennerzhañ a-berzh e vignon Kiprian.
- War-dro 303, e Kalkedonia e Bitinia, da vare heskinadeg Diocletianus, merzherenti santez Eufemia, gwerc'hez. Goude bezañ bet jahinet e voe roet d'al loened.
- E 735, santez Ujenia, gwerchez, c'hoar santez Gunelind, abadez Hihenbourg war-lerc'h he moereb santez Odila.
- E 921, e Praga, merzherenti santez Ludmilla, dugez Bohemia. Paganez pa voe gonezet d'ar C'Hrist. Desevel a reas he mab bihan a zeufe war-lerc'h da vezañ sant Wenseslaz. Taget e voe gant he merc'h-kaer Drahomira dre gasoni evit he feiz.
- E 984, santez Edit, gwerc'hez, abadez Santez-Vari Wilton e Bro-Saoz, merc'h da Edgar, roue an Angled.
- E 1087, ar gwenvidig Viktor III, pab. Abad Monte-Casino e oa abaoe tregont vloaz pa voe diuzet da bab e 1087 d'ur c'houlzad treboulet-kenañ.
- E 1122, sant Vital a Savigny, abad, mignon ar wenvidion Roperzh Ervrezhel, Raoul ar Fusteg, Bernez a dTiron. Ganet e-kichen Bayeux e oa chaloni e Saint-Evrout ha da c'houde chapalan Robert de Mortain. Dilezel a reas e garg evit mont da benitiour. Sachañ a reas diskibled e-leizh hag e savas evito abati Savigny e Normandia a zeuas da vezañ abati mamm meur a gumuniezh. Diazezañ a reas abati Mortain evit e c'hoar Adelina.
- E 1280, santez Mektild a vMagdebourg, leanez. Kevrinourez alaman, e voe da gentañ beginez e Magdebourg e-doug daou ugent vloaz ha da c'houde ez eas da abati kisterkiat Helfta m'en em gavas gant santez Jertruda ha santez Mektild Hackeborn. He skrid *Das fließende Licht der Gottheit* («Sklêrijenn ar Wirionez») a chom evel un daveenn varzhonel ha speredel a-bouez eus he grez.
- E 432, distro da Zoue ene sant Ninian, eskob, kentañ abostolour ar bPikted. Hag eñ mab d'un tiern brezhon, ez eas d'ober e studioù e Roma. Eskobet gant ar pab Bonifacius Iañ, e voe kaset kerkent da avialañ Pikted Breizh-Veur. Mont a reas da birc'hirinañ war bez sant Varzhin evit goulenn e vennozh war e abostolerezh. E Whitehorn e Bro-Galloway e savas un iliz e maen a voe anvet Candida Casa, an "Ti Gwenn", hag a voe kreizenn abostolerezh ar vro.
- En deiz-mañ e c'heller ober Kounidigezh holl sent Bro-Skos.
- En Iwerzhon, sant Tegan (Iw. Teagan), manac'h.
- Dedi iliz-veur Sant-Steven e Sant-Brieg.

D'ar 17 a viz Gwengolo

- War-dro 377, sant Satiro, breur sant Ambroaz Milano. Ne oa ket anlaezet c'hoazh da gevrinennoù ar C'hrist pa c'hoarvezas gantañ ober peñse. Savetaet eus an dourioù, e c'houlennas ar vadeziant. Chom a reas unanet ouzh e vreur Ambroaz dre ur garantez birvidik ha pa varvas e voe sebeliet gantañ e-kichen bez sant Viktor, merzher.
- War-dro 557, sant Lubin, eskob Chartrez, mignon sant Avid ha sant Albin. Ganet e rannbarzh Poitiers en un tiegezh kouerion ez eas da abati Ligugé. Deuet da vezañ abad Brou e voe diuzet da eskob Chartrez. Hervez an hengoun e saveteas Pariz eus un tan-gwall. Hag eñ eus bagad ar sent pareourion e vez kehelet e meur a lec'h e Breizh.
- E 705, e Luik, merzherenti sant Lamberzh (Gg Lambert), eskob Maastricht, abostolour ar vro. Goude un nebeud bloavezhioù en harlu en deus bet ul levezon vras war dachenn ar vuhezegezh hag ar vuhez speredel e lez Aostria hag e ilizoù Belgia.
- E 1104, sant Renald (Gl. Renaud pe Régnault), penitiour, diskibl ar gwenvidig Roperzh Ervrezhel. Da gentañ chaloni reoliek e Soissons en em lakaas da-heul Roperzh Ervrezhel. Bez' e voe penitiour e koadeg Kraon ha diwezhatoc'h e koadeg Mélinais lec'h ma varvas.
- E 1179, e kêr vMainz, santez Hildegard, gwerc'hez, abadez beneadat Rupertsberg e-kichen Bingen en Hessen e Bro-Alamagn, disklêriet doazhourez eus an Iliz gant ar Pab Benead XVIe 2012. Desket-meurbet war skiantoù an natur, ar vezegiezh, ar sonerezh, e voe aotreet dezhi diskuilhadoù kevrennel a zo bet dezrevellet en he levrioù.
- E 1621, sant Roperzh Bellarmino, beleg jezuist, kardinal, doazhour eus an Iliz. Ganet e Bro-dToskana ez eas d'e driwec'h vloaz e Keneilezh Jezuz. Studiañ a reas e Leuven hag e teuas da vezañ kelenner eno. Diuzet da vezañ e penn rannbarzh Napoli e voe fiziet ennañ kargoù a-bouez eKuria Roma hag e voe anvet kardinal-eskob Capua. Difenn a reas a feiz katolik o skrivañ e Rendaoloù hag ar C'Hatekiz Bihan ma voe bras ha padus e levezon.
- Louc'hidigezh goulioù sant Frañsez Assizi e 1224.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Urfol, eontr sant Herve, manac'h e Bro-Leon, savour ur minic'hi e-kichen Plouvien, beziet er Vourch-Gwenn.
- War enez Vreizh (Kembre), e Trefynwy (Monmouth e saozneg), IIIde kantved, merzherenti ar sent Steven ha Sokratez, diskibion sant Amfibal.
- En Iwerzhon, er Vvet kantved, sant Grellan (Iw. Greallán), diskibl sant Padrig e Gaillimh (Galway).
- En Iwerzhon, santez Feime (Gwemez), maouez santel.
- E 853, e Kordoba e Bro-Spagn, merzherenti santez Koulm, leanez, Iwerzhonadez, dibennet war urzh ar c'hadi.
- E 680, sant Rodin pe Rodan (Lt. Rodingus), abad Beaulieu er Champagn, Iwerzhonad, diskibl sant Koulman Veur.

D'an 18 a viz Gwengolo

- E kantvedoù kentañ ar gristeniezh, e Primnez e Frijia, merzherenti santez Ariana. Sklavourez e oa pa voe savet prosez outi en abeg d'he feiz betek he barn d'ar marv.
- En IIIde kantved, e Viena e Gallia, merzherenti sant Ferreol, mignon sant Juluan Brioud. Tribun el lu, e nac'has azeuliñ an idolennoù hag e voe lakaet d'ar marv. Uzh e aoter en iliz-veur Naoned e voe drouklazhet an eskob sant Konarzh.
- War-dro 310, e Nikomedia e Bitinia, da vare Maximianus Herculius, merzherenti ar sent Teodor, Oceanus, Ammian ha Juluan.
- E 1661, sant Bidzin eus Georgia, Priñs Georgia a voe merzheriet en abeg d'e feiz gant Abbas II, Shah ar Bersed, a-gevret gant e diegezh.
- E 1663, e Osima e-kichen Ancona, sant Jozef Cupertino, beleg eus ar Vreudeur Minor ha da c'houde Koentat, brudet evit garismoù dibar, e zibradioù hag e vurzhudoù leun-barr a garitez.

- E Breizh, er VIIvet kantved, merzherenti sant Ider pe Dider (Lt Desiderus), eskob Roazhon. Ganet e Roazhon e voe un eskob santel a bleustras oberoù mat evit e bobl. Kemer a reas perzh e senez Rouen e 693. Mont a reas da birc'hirinañ da Roma gant e arriagon Renfrez ha beleion all. O tistreiñ, p'edont o treuziñ ar Vagovia (Vosges) evit mont da weladenniñ ar vaouez santel Pomponia e voent taget gant riblerion ha treuzet gant taolioù kleze. Tremen a reas o pediñ betek e huanad diwezhañ.
- A-gevret gant sant Ider e lider sant Renfrez (Gg. Rainfroy), e arriagon lazhet a-gevret gantañ.
- En Iwerzhon, er VI vet kantved, sant Enan, manac'h.
- Treuzlec'h relegoù sant Gwinnog.

D'an 19 a viz Gwengolo

- War-dro 304, merzherenti sant Genver pe Gennaro, eskob Benevento en Italia, lakaet d'ar marv gant c'hwec'h kristen all ha beziet e Napoli. Miret eo bet ur glogorennad eus e wad a ya da liñvennañ bep bloaz, a-wel d'an holl, da geñver gouel ar sant ha gouelioù liderezhel all.
- War-dro 362, e Palestina, merzherenti santez Suzanna. Ganet eo war-dro 310 da vare an impalaer Maximianus e Eleuteropolis eus un tad idolour hag ur vamm yuzevez. Goude o marv e voe kelennet a-zivout ar feiz ha badezet. Neuze e tasparzhas he madoù etre ar beorion hag en em dennas en digenvez. Da vare Juluan an Dianzavour e voe tamallet da vezañ tumpet idolennoù ha barnet d'ar marv.
- E 690, sant Teodor, arc'heskob Kêrgent e Bro-Saoz. Genidik eus Tarsiz e Silisia, e voe manac'h en Aten hag e Roma. Eskobet gant ar pab sant Vitalian, e voe kaset pa oa tost d'e dek bloaz ha tri-ugent a-gevret gant sant Hadrian da astummañ Iliz Bro-Saoz, pezh a reas gant berzh.
- E 1852, santez Emilia a Rodat, diazevourez Leanezed an Tiegezh Santel. Ganet damdost diouzh Rodez e tigoras ur skol evit ar beorion e Villefranche-de-Rouergue a voe penn-kentañ an urzh a gonte eizh ti ha tregont pa varvas.
- Emziskouezadenn Itron-Varia ar Zaled e 1846 en eskobiezh Grenoble a c'halvas d'ar bedenn ha d'ar binijenn evit an Iliz gloazet gant disfealded he izili, hag evit ar bed skoet gant gwalennoù a bep seurt.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Riware, penitiour, beleg, breur sant Urfol ha santez Riwanon, mamm sant Herve.
- E 530, sant Senour (Gl. Sénieur, Senoux), eskob iwerzhonat bet eskob e Dol. Hervez Dom Garaby e vije deuet da Vreizh da vare Konan Meriadeg ha startaet feiz ar Vretoned nevez erruet e kornad Bro-Dol ha kanttroet tud ar vro chomet evit lod er baganiezh. Urzhiet en dije sant Padrig. En em dennet en dije nepell diouzh Gwizien en eskobiezh Sant-Maloù lec'h m'emañ bremañ Sant-Senour. Eno eo bet distroadet hor sant gant sant Sennen, ur Persad merzheriet e Roma a-gevret gant e geneil Abdon en trede kantved.
- En Iwerzhon, santez Kuñvell (Iw. Caomhgheal), maouez santel.

D'an 20 a viz Gwengolo

- E 310, e Palestina, merzherenti sant Yann an Egiptad, bet meulet gant Euseb Kaezarea. Dreistvevet en doa d'an heskinadurioù met troc'het e oa bet e izili abalamour d'e feiz er C'Hrist. Kollet en doa daoulagad ar c'horf. Hogen e tisplege pennadoù a-bezh eus ar Skritur Santel o tiskouez ez eo an den diabarzh an hini pouezusañ. Eus a bell e teued d'e gaout dre ma oa diouganer.
- E 318, e Roma, da vare Hadrianus, merzherenti sant Eostate (e gresianeg Eustathios hag e latin Eustathius). Placidus eus e anv kentañ a oa Jeneral e lu an impalaer Trajan pa reas ar vadeziant a-gevret gant e wreg (Tatiana alias Theopista) hag o bugale (nevez anvet Agapios ha Theopistos) goude bezañ gonezet d'ar feiz e-doug un hemolc'hadenn pa welas ur groaz o lugerniñ etre kerneil ur c'harv.
- E 690, e Bro-C'Hall, santez Haeresvid pe Hereswyde, mamm a diegezh ha manac'hez. Priñsez eus Norzumbria, c'hoar santez Hilda eus Withby e timezas gant Aethelhere roue Angled ar Reter. Ur wezh desavet he bugale ez eas da vanac'hez da Chelles e Reter da Bariz lec'h ma echuas he buhez.

- Lakaet d'ar marv etre 1839 ha 1864, Merzherion Korea, sant Andrev Kim Tae-gon, beleg, sant Paul Chong Ha-sang hag o c'humpagnuned,- E 1837, en Tonkin er Viêt Nam a-vremañ, merzherenti sant Jean-Charles Cornay, beleg eus Kevredigezh Misionoù Diavaez Pariz.
- E Breizh, e 1541, ar pac'hiad Erwan Maeg, eskob Roazhon, ganet e Plouvorn e Bro-Leon, dominigad e Montroulez, kofesour dugez Anna Breizh.
- En Iwerzhon, sant Moghaidh (Moez), manac'h en Iwerzhon.

